

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**Son ar gevier** (Me 'zo 'vont da ganañ deoc'h)

Me 'zo 'vont da ganañ deoc'h *O far digou digou tra lala*  
Me 'zo 'vont da ganañ deoc'h ur chañson leun a c'hevier ("a c'heier")  
ur chañson leun a c'hevier (bis)

Ha ma'z eus enni ur ger gwir  
Me 'zlefe koll va buhez

Disul vintin pa oan savet  
An dud 'vont d'ar gousperoù

Me 'samm un arad war va skoaz  
Ha mont d'an aod da arat

E-touez ar vein hag ar c'herreg  
Pere ne oant ket kalet

Ha d'an distro ach'ano  
Me rankontras ur wezenn

Ur wezenn ber, avaloù trenk  
Hag hi karget a spezad

Ha me 'reiñ un taol bazh dezhi  
Hag hi a ziskarg mouilc'hi

Klujiri ha kefeleged  
Hag ar rest all oa merc'hed

Div anezho a oa koant  
Hag an div all deskamant

An div vravañ 'gameran  
Hag an div all a lezan

Neuze an div all a lavare  
Hor c'hasit ganeoc'h ivez

Ur wech all pa zeomp en-dro  
Neuze ni ho kemero

Benn ur wech all pa zeuoc'h en-dro  
'Benn neuze ni 'vo maro

Ni vo maro hag enteret [pe : ha douaret]  
Lakaet hor c'horf er vered

Ha war ar bez e vo savet  
Teir vleunienn eus ar gaerañ ("deus")

Unan 'zo ruz, unan 'zo gwenn  
Hag eben all 'zo violenn.